

LETANI ITRON VARIA VREIZ

Aotrouù, Ho pet truez,
Krist, Ho pet truez,
Aotrouù, Ho pet truez,
Treinded Sakr, Doue unan, Ho pet truez,
Santez Vari, Mamm da Zoue, pedit evidomp,

Itron Varia C'hras,	I. V. ar Joa,
I. V. an Erc'h,	I. V. Wir Sikour,
I. V. ar Bleunv,	I. V. C'halloud,
I. V. Feunteunioù,	I. V. Vurzudoù,
I. V. ar C'helou mat,	I. V. Remed holl,
I. V. Gavel,	I. V. Sklaerder,
I. V. Nazared,	I. V. Gonfort,
I. V. an Neiz voualc'h,	I. V. ar Ouestl,
I. V. an Drein,	I. V. ar Veaj vat,
I. V. ar C'halvar,	I. V. an Hent,
I. V. ar Gwad Santel,	I. V. ar Porz Gwenn,
I. V. Druez,	I. V. Garmez,
I. V. an Trec'h,	I. V. Lored,
I. V. ar Baradoz,	I. V. Folgoad,
I. V. an Aeled,	I. V. Vreiz.

Oanig Doue, a lamm kuit pec' hedou ar bed, Ho pet truez ouzimp (teir gwech),

Pedit evidomp, Mamm Santel da Zoue,
Ma vimp evit resev donezonouù an Nenv.

PEDOMP

O Tad, hag en deus roet dimp ar silvidigez en Ho Mab, ganet eus ar Werc'hez Vari, gratait dimp en abeg d'he fedenn, pez a c'hoanta hor c'halonoù evit hor mad hag hini hoc'h ano. Dre an hevelep Jezuz Krist, ho Mab hag hon Aotrouù, a ren hag a vev ganeoc'h en unvaniez ar Spered Glan, a zo Doue, a gantvedouù da gantvedouù.

Evelse bezet graet.

PEDENN DA GALON DINAMM MARI

Unanet gant hon Tad Santel ar Pab, gant holl gris-tension ar bed, kement ene 'zo en gras an Tad war an douar-mañ, unanet gant an holl Sent er Baradoz, e fell dimp en em santout muioc'h mui stag ouz hon Salver Jezuz-Krist, Roue ar bed, ha kompreñ gwelloc'h mister e Iliz. Rouanez an Iliz ha skeudenn an Iliz oc'h c'hwi, Gwerc'hez Vari, a ziskouez dimp penaos e tleomp bezañ unanet gant Jezuz ha kenlabourat d'ar silvidigez. Ha setu perak en amzeriou trubuilhus a vevomp e c'houlennomp diganeoc'h ma teuio ho Mab ha Mab Doue da ren war hon eneoù hag eneoù an holl dud er bed, ma teuio ennomp Rouantelez an Tad, en unvaniez ar Spered Glan. Goulenn a reomp diganeoc'h ma teuio Rouantelez Doue en hon Bro, ha ma vo adsavet ar rivinoù a zo en kalon hon broiz, an dismantrouì-ilizoù ha tiez-pediñ a zo abaoe keit e douar Breiz, oc'h hivoudiñ war-du an Nen.

Ha setu perak hiziv, e westlomp deoc'h hon Breiz, hag e roomp deoc'h adarre an ano a Itron Varia Vreiz, evel m'o deus graet hon Tadoù en amzeriou kent. Mirit ar pez zo deoc'h, ha klevit gant hon mouezioù dister, mouezioù galloudus an holl Vretoned, hag an holl Sent eus ar Vro, a ren e lein an Nenv, hag a unanomph hon pedenn gant o hini da Jakaat Breiz Izel dindan ho kwarez. Rentit dezi he spered, he nerz, he c'hened, hag un diamant e vo, o lufrañ war ho kn-runenn veur.

Bennigit kement hini en em ro da ziazezañ er Vro ar Reizder kristen. Ha ni iveau hiziv o 'n em lakaat dindan ho kwarez, e kinnigomp deoc'h hol labourioù, hon menoziou, kement a zo ac'hanoomp, korf ha spered. En em westlañ a reomp deoc'h, Itron Varia Vreiz, ouz ho tibab da Rouanez war gement tra a raimp Mamm druezus.

Evelse bezet graet.

LETANI SENT VREIZ

Aotrouù, Ho pet truez,
Krist, Ho pet truez,
Aotrouù, Ho pet truez,
Treinded Sakr, Doue unan, Ho pet truez,

Santez Vari, Mamm da Zoue, pedit evidomp,
Itron Varia Vreiz, Pedit evidomp,
Santez Anna, hor patronez, Pedit evidomp,
Sant Erwan, Tad ar Vretoned, »

Sant Samzun,
Sant Brieg,
Sant Malo,
Sant Tudual,
Sant Kaourantin,
Sant Paol,
Sant Padern,
Sant Melani,
Sant Kler,
Sant Gwilherm,
Sant Yann ar Gael,
Sent Donasian ha Rogasian,
Sant Gwenole,
Sant Gwenael,
Sant Gweltas,
Sant Meven,
Sant Konvoion,

Sant Herve,
Sant Ildud,
Sant Briak,
Sant Maodez,
Sant Arzael,
Sant Maoris Langoned,
Sant Ronan,
Sant Kado,
Sant Salaün,
Sant Jezekel,
Sant Eflam,
Den Evurus Loeiz Grignon Monforz,
Santez Enora,
Santez Gwenn,
Santez Nonn,
Santez Trifina,
Sent ha Santezed Breiz.

Oanig Doue, a lamm kuit pec' hedouù ar bed, Ho pet truez ouzimp (teir gwech).

Salvit, Aotrouù, ho servijerion,
Pa sellont ouzoc'h gant esper.

PEDOMP

Doue, hag hoc'h eus lakaet ho Sent da ziwan war zouar Breiz, a-hed ar c'chantvedoù, roit d'hor Bro, gant o skoazell, ar c'hras d'adsevel e nerz ho reizder, ma tiwano en hon touez sent nevez evit kchod ho Rouantelez. Dre Jezuz-Krist, ho Mab hag hon Aoñrou, a ren hag a vev ganeoc'h en unvaniez ar Spered Glan, a zo Doue, a gantvedoù, da gantvedoù.


Evelse bezet graet.

IMPRIMATUR:

Brioci, die 20^a Octobris 1945.

Y. BROCHEN,

v. g.



Skignit ar follennoù-mañ. O goulenn digant « Unvaniez Speredel Breiz », Les Petites-Salles, Guingamp. An dek : 8 lur. Ar c'chant : 50 lur. (E brezoneg pe e galleg).